

— 7 —

Ha pa ea dirazàn e presant e c'honje :
 Ia, Sire emezi, me zo bet en arme ;
 Gout a ràn an exercic ha mania ar zabren,
 Ha laqat da dehel meur a adversourien.

Ar Roue mad neuze neus-hi recompencet,
 Vel eur soudard vaillant en devoa meritet,
 Rac-se merc'het yaouanq, re dit oll d'an arme,
 Hac ho po recompanç ive gant ar Roue. *Fin*



26
 SON

HERRI PÉVAR

ROUE FRANÇ

Var an ér gallec.

Na pebes Roue
 Eo bet Herri goechal !
 Coulz a ell bale :
 Mes nicun en tu all
 Ne vezo guelet
 En franç nac en lec'oh all.

Ar Roue Herri
 A voa eur pot dious-tu,
 A garrie hardi
 E JANNED ha giun ru,
 Hac ho combatti
 A vouie cregui dru.

— 8 —

E creis ar gombat
E comzas evellen :
Dalc hit ho lagad
Var va flumachen ven,
Sur eo d'o laqat
Bepred er guir rouden.

Herri a garrie
An dud divar ar mêz,
Hac a reqete
L'o dije bep sulvez
Yar er pod deze
Da zebri en ho èz.

Herri pêvare
N'en deo get maro c'hoas
Rac e vugale
E ligne hac e raç
Zo leun a vue :
Graç deo da chom hiel bloas.

Mar distro biqen
An diaoul da c'hoari vas,
Guest omp da zouten
Ar Roue en e blaç
Ha prest ha laouen
Da rei peb a dol bas.

FIN,

E Montroulez, eus a imprimeri P. LANOË.